


10.

Hag en diztro, Guerc'hez ar Joa
 Digemerit hor promessa :
 Parrez Penmarc'h da virviken
 A zalc'ho mad d'ar feiz kristen.

Imprimatur :**P. MESSAGER,**

Vic. gén.

8 Juillet 1920.

D'AN**INTRON VARIA AR JOA****PARREZ PENMARCH**VAR DON : *E Sakramant ar Binjen.***DISKAN**

*Guerc'hez Vari, Guerc'hez ar Joa,
 'Vel eun tour tan, skler o lintra
 Hentchit bepred an dud a vor } bis.
 Beteg ar porz hag ar goudor.*

1.

En eur dremen 'biou d'ho chapel,
 Ar gweliou stenn gant an avel,
 Ar martolod, ha deiz ha noz
 A fell d'ezan kaout ho pennoz.

2.

Pa bar an eol en oabl lirzin,
Pa vel ar mor o vousc'hoarzin,
Ar martolod en e labour
A fell d'ezan kaout ho sikour.

3.

Pa gouez varnan an noz tenval,
Pa glev an avel o yudal,
Ar martolod evit c'herzel,
An deuz ezom euz ho skoazel.

4.

Ha pa veler divar an ôd
O vont da goll ar martolod
E bried hag e vugale
A deu d'ho pedi hep dale.

5.

Eur vech teac'het deus ar reier,
Eur vech tennet a bep danjer,
Ar martolod a zo dinam
A bok d'ho skeuden 'vel d'he vam.

6.

Pa deu, siouaz ! Ar mor garo
Da roi d'ezan taol ar maro,
Ar martolod, en eur vervel
A zav he vouez 'vit ho kervel.

7.

Guerc'hez Vari, Guerc'hez ar Joa
Prim varlerc'h o heur divéza
Grit ma kavo an dud a vor
Porz an nenvou bepred digor !

8.

Guerc'hez ar Joa, beteg ho ti
An oll a gar dont d'ho pedi :
Roït eta c'hoaz ho sikour
D'al labourer, d'ar micherour.

9.

Braz ha bihan, yaouank ha koz
An oll a c'houlen ho pennoz ;
Lakit da ren al levezenez
En oll dier euz ar barrez.